

Nnn 144

# FIN HA FOLL Louannig



Un  
distro-skol  
war  
blankenn-ruilh !

P.14

# Distro - skol laouen dit !

P.4 Petra 'nevez er bed ?



P.5 Titeuf



P.6 Penaos ober  
troioù- vrec'h  
gant stirenoù ?

P.8-9 Da implij- amzer  
da zistagañ !

P.7 Naggeneen



P.10 Mewriad



P.11-13 Paotr- Louarn

P.14-15 Degemer mat e Skateistan !

P.16 Krak- ha- berr

# Louarnig

Mensuel - N°144 du septembre 2014  
5 € an niv. / 5€ le n°  
60 € ar bloaz / 60€ l'année  
Niv. CPPAP : 0514680670

Embannet gant / édité par :  
KEIT VIMP BEV 29520 LAZ

Renner an Embann /  
Dir de Publication :  
Yann-Fañch Jacq, yf.kvb@orange.fr

Kenurzhier / Coordinatrice :  
Camille Argouarc'h,  
camille.kvb@orange.fr

Maketenn / Maquette :  
Camille Argouarc'h,  
camille.kvb@orange.fr

Moulet gant / imprimé par :  
SOFAG, BP21 - 29590 AR FAOU  
Skeudenoù a zo implijet gant  
Aotr-Implijout Creative Commons

<http://creativecommons.org/licenses/by-sa/2.0/legalcode>

P.4 Gaza : Bilphotography (flickr)

P.16 Fart : Banjo D (flickr)

P.16 Learning sign language : Daveynin (flickr)

Embannet gant skoazel  
Avec le soutien de :




Korn al lernigoù

## KENSTRIVADeg VRAS AN HAÑV

Kaset eo bet an dresadenn-  
mañ gant Lan a liij dezhañ  
tresañ e guenn ha du.

Gourc'hemennoù dit, Lan !

Reservout a ri ur bladenn gant  
Krismenn hag ul lerr !

Brav e selgant bezañ ar vuhez  
e Bro-Japan ! O c'hoari, o  
c'hoari hag o c'hoari atav... 

## Bro-Japan





« Sandrine,  
perak e kan  
al laboused ? »

Goulenn ha tresadenn gant Lila



**Lila,**

Dihunet e vezez gant al laboused a-wechoù ? Re abred, neketa ?

An evned bihan eus familh ar golyeni, mouilc'hi, drasked, pintiged hag an eostiged brudet a gan diouzh an noz zoken, eo ar ganerien wellañ. Pep gouenn he deus ur c'han dezhi hec'h-unan ha pep labous en deus ur c'han dibar hag a lak al laboused all da c'houzout piv a zo o kanañ en ur bod pe uhel er wezenn.

Peurliesañ eo ar bared eo a gan. Ne ganont ket evit ar blijadur. Kanañ a reont evit mirout ouzh pared all da zont war o zachenn. Sachañ a reont ivez evezh ar parezed gant o c'han heson\*. Gwelloc'h eo d'ar parezed ar bared a gan gant startijenn : talvezout a ra int yac'h.

Broudañ a ra ivez kan ar bared d'ar gouennañ\* : seul abretoc'h e tozvo ar barez, seul muioc'h a viov a vo. Ar c'han a zo un dra talvoudus e buhez al laboused.

Kenavo ar wech all !

**Sandrine**

\*ar mare ma vez graet babigoù ganto.

Ma 't eus c'hoant goulenn un dra bennak e-keñver al loened gant Sandrine, ar vedisinez-loened, kas ur goulenn din. Ha ma rez un dresadenn, e vo embannet ivez ! Skriv ur postel da : [camille.kvb@orange.fr](mailto:camille.kvb@orange.fr) pe ul lizher da : Louarnig, Keit Vimp bev, 22 grand rue, 29520 Laz

**PUNKED  
LOUARNIG**

Gourc'hemennoù  
da bPunked vravañ Louarnig :

**Lanwenn  
ha Dewi !**

Awenet mat int bet gant an  
divbajennad war ar bPunked hag ar  
Ramoneurs de Menhirs !

Resevout a reoc'h ur bladenn  
gant Krismenn hag ul levr !

**YEAH!**




**PETRA  
'NEVEZ ?**

# **GAZA, PALESTINA**



E miz Even e tarzhas ar brezel adarre etre Bro-Izrael ha Bro-bPalestina. N'eo ket kempouez an armoù gant an daou du. Setu ma `z eus kalz muioc'h a dud varv ha gloazet a zo eus tu ar Balestinaniz, hag an darn vrasañ anezho a zo yaouank : kantadoù a vugale a vezont lazhet e-korf un nebeud si-zhuniou. Ret eo d'ar brezel-se paouez buan !

War ar poltridi peotramant er reportajoù er skinwel `teus gwelet ar jestr-se moarvat a ra ar Balestinaniz gant o bizied. Se `dalvez e c'houlennont ar **PEOC'H** en o bro.



Merc'hed Bro-C'hall e glas

©FFR



Merc'hed Bro-Saoz

## **RUGBI :** **TOST ZO BET DEZHO GOUNIT KIB AR BED !**

Sur, n'o deus ket merc'hed ar rugbi kement a helev ha paotred ar vell-droad e Kib ar Bed na re ar rugbi. Domaj eo, rak ar merc'hed-se a zo barrek !

Trec'het aes o deus war kazi an holl skipailhoù hag en 3<sup>de</sup> plas int degouezhet a-benn ar fin ! Aet eo ar maout gant ar re saoz, amañ war ar poltred gant ar c'hib.

Ha plijout a ra ar rugby dit ?

Istim etre an dud

Spered skipailh

Spered digor

Sed'aze perzhioù ar rugby...

Ha te, peseurt sport eo an hini a blij dit ar muiañ ?

# Titeuf

stlak ar sach



## C'HRAK



Tennet eus « Kenô Bed Kriz »

**BANNOÙ-HEOL**  
b-heol.com


# PENADS OBER TROIOÙ-BREC'H GANT STIRENNOÙ ?



Gant an ostilh-mañ pe etre daou viz, lak ur stirenn (1) e stumm un 8.



Ouzhpenn div stirenn (2, 3) a-us d'an hini e stumm un 8.




Gant da vizied pe gant un ostilh roet gant ar pakadoù stirennoù, sach ar stir 1 a bep tu d'an 2 ha d'an 3.



Ouzhpenn unan all (4) a-us d'an teir kentañ. Dit da zibab al livioù hag o urzh, n'eo ket ret dit ouzhpennañ unan gant ar memes liv hag an hini kentañ.



Kemer ar stirenn 2 (an hini roz amañ) ha sach anezhi a bep tu d'an div all.



Ouzhpenn ur stirenn all (5) (memes liv hag ar stirenn 2 ma fell dit kaout 3 liv). Ha kendalc'h e mod-se, o sachañ ar stirenn 3 war ar stirenn 5, ha memestra da-heul...


Evel Anaïs (eus skol divyezhek Sant Teve), kas da Louarnig ur poltred gant da dro-vrec'h vravañ !

Brav eo da dro-vre'h, Anaïs !




Embannet e vo hag e resevi ur sac'hig stirennoù !  
Camille.kvb@orange.fr

DEUET E DA AN DISKAR-AMZER DIJA. «HAÏV AR BUCKWOODGENIES» A VEZE GRAET EUS AR MARE-SE GANT RUDDY HAG AR RE ALL.



WAR VERRAAT EZ AE AN DEVEZHIOÙ. A-RAOK AR C'HUIZH-HEOL E RANKE NAGGENEEN KAOUT BOD.



E-BARZH UR WEZENN-VEZV KOZH E KAVAS PLAS A-BENN TREMEN AN NOZVEZH KENTAÏ WAR AN DOUAR DIANV-SE.



UR WECH E-BARZH E KLEVAS UR C'HWEZH KREÏV HA N'ANAVEZE KET.



UR SKOÛS\* A DA ENO : UR BRAMM FLAERIUS A LAOSKAS, KEN SOUEZHET MA DA !



RANKOUT A REAS NAGGENEEN TENNAÏ E ZILHAD DEUET DA VEZAÏ FLAERIUS HA KAVOUT A REAS UR C'HEV E LEC'H M'EN EM DAOLAS DA GOUSKET.



NOAZH-PILH E DA. LAKAAT A REAS DEWOÙ E-LEIZH WARNAÏ, KUIT DA DAPOUT RIV.



DAOUST D'AN DEGEMER KET GWALL ISKIS A DA BET GRAET DEZHAÏ GANT AR SKOÛS, E KAVAS NAGGENEEN BUAN AR C'HOUSK. BÛRUS E DA.



UR SKOÛS\* : LOEN BRONNEK GWENN HA DU HAG A LAOSK BRAMMOÙ FLAERIUS A-BENN LAKAAT E ENEBOURIEN DA SKARZHAÏ KUIT !

MA IMPLIJ  
AMZER

BLOAVEZH-SKOL

MA ANV : \_\_\_\_\_

MA SKOL HA MA C'HLAS : \_\_\_\_\_

LUN

MEURZH

MERC'HER



2014-2015

SADORN

YAOU

15 empty rounded rectangular boxes for notes, arranged vertically on a green background.

GWENER

15 empty rounded rectangular boxes for notes, arranged vertically on a pink background.

Two large empty rounded rectangular boxes for notes, arranged vertically on a blue background.

SUL

Two large empty rounded rectangular boxes for notes, arranged vertically on a blue background.

DIBENN-SIZHUN!



# MEURIAD

Senario & tresadenn gant Gilles Sangla. Brezhoneg gant Keit Vimp Bev.

GOURC'HEMENNOÙ DEOC'H  
HO-TAOU !

DEUET OC'H A-BENN DA  
LAKAAT KROUADURIOÙ AN  
TEŃVALIJENN, DA BELLAAT !

KIT DA  
ZISKUIZHAÑ.  
MERITET HO  
PEUS.

TRUGAREZ  
MESTR  
FINN,  
NOZ VAT !

Spered Erebor, mestr an teñvalijenn,  
a zeuas da welet anezhañ avat...

ROONN  
PFLLLL

ROONN

HA NEUZE ?...  
TE EO ZO BET  
TREC'H WAR MA  
SOUDARD BRAS ?

RRRRR

NE SEBLANTEZ  
KET DROUK  
KOULSKOUDE...  
PE UN ARM KEVRINUS  
'TEFE ?

?!?!?

FROUT!

EEEEEC'H !  
PEBEZH ARM SPONTUS !  
RET 'VO KAVOUT UN DOARE  
DA WAREZIÑ MA SOUDAR-  
DED OUZH AR C'HWEZH  
FLAERIUS-SE !

DA VEZAÑ KENDALC'HET...

OK,  
N'OC'H KET AN  
HINI A SONJE DIN,  
L'ARIT DIN DRE  
BELEC'H MONT  
KUIT MAR PL...

...A!  
PETRA  
EO  
SE ?!

UR GADOR-VRECH  
DIBAR.  
HINI  
NEHEBKAOU\*.

KIT EN HO  
KOAEZ.  
EMAON O  
VONT DA  
BAREAJ HO  
TAOLLAGAD.



FORZH PETRA!  
WAR-BOUEZ  
DRESAN MA  
LUNEDOÙ, NE  
C'HELLIT KET  
NETRA EVIDON.

AZEZIT.



DISKOUEZIT HA  
L'ARIT ANU UL LOEN A  
WELT TRO-DRO  
DEOC'H.  
UNAN OC'H GOUEST  
DA WELET, ANAT.



ESTREGET  
AR  
C'HROKODIL  
LAKAOMP ?

EU...  
AL LOIARN,  
EN NEC'H ?

E LATIN,  
"VULPE",  
AL LOUARN..

GWIDRE\*  
HA  
PALC'HAMANT.

UN DREMMWEL  
BAMUS.  
C'HWI DA  
ENGORFAN\*  
KEMENT A GALTE.

ENGORFAN ?  
OC'H OBER  
PETRA EMAOC'H  
RESIS ? LUNEDOU  
PAPER ?

PEOC'H!  
N'EO KET PAPER,  
KROC'HEN  
KIVIJET\* AN HINI  
EO.

LAKAIT  
SE DIRAK HO  
TAOULAGAP.

KLOUAR EO!  
TOST...  
BEV.

GRA AR PEZH A LAR  
AN DEN, PAOL.  
PA C'HORTOZ E VIJE  
NIZAR AET KUIT.

BREMAJ,  
LENNIT AN  
DIJ BAJENNAD  
AHONT.

TROADUR PENN  
'M EUS...  
ABALAMOUR DA  
VOGED AN EZAS  
MOARVAT.

PE MARTEZE EO  
KANAB, A-BENN  
LAKAAT AN DUD DA  
VEZAN LAOSK HA  
GELLET O LAEREZH ?

ABALAMOUR DA SE  
EO EN EM SANTAN  
KEN MAT  
MARTEZE.

PA GONTIN-SE  
D'AM  
C'HAMALADEO  
WARC'HOAZH NE...

BON, RET 'VO  
DIN LAR DEZHAN  
EO POENT DIN  
MONT.

DROL EO...  
UN TOUELL  
'VEFE ?

SINOÙ EJPSIAN ?  
N'INT KET. LIZHEREENNOÙ  
DA VET.

DONT A RA AR  
STUMMOÙ DA  
VEZAN  
SPLANN DIN !

DIGREDOUS !  
DONT A RAN  
A-BENN DA  
LENN ABELL !

INPOU\* !  
PA VIN ANVET HA  
GALVET D'AL LABOUR,  
FORZH PESEURT HINI  
A VEFE, A DLE BEZAN  
GRAET GANT MAB-DEN  
HAG A RANKIN-ME  
OBER.

DEUS EM FLAS !  
GWECH HA GWECH  
A-BENN LABOURAT  
POUAR AR PARKEIER,  
GWAZHIAR AL LEZ,  
EN UL LAVARAOUT  
« SETU-ME ! »

DIBOELL  
PENN-DA-BENN !  
EY !  
DEBRON  
'M EUS !  
PETRA  
AN  
DIAOUL  
EO...

WARRRRRRR

Debron : kaout c'hoant skrabaat.  
Kivijet : kroc'hen ul loen bet aozet evit ober ler.

\*Inpou' : Doue ejpsian, korf ur c'hi dezhan  
Tonell : Un dra a weler ha n'eo ket ar wirionez.

# Degemer mat e **SKATEISTAN!**



E kreiz Azia emañ Bro-Afghanistan.

Meur a vrezel a zo bet hag a zo c'hoazh eno. Unan eus broioù paourañ ar bed eo homañ ha start eo ar vuhez evit ar vugale. Rankout a reont labourat e lec'h mont d'ar skol hag e c'hoarvez da lod dimeziñ a-raok 18 vloaz, dreist-holl d'ar merc'hed. Hervez al lezenn eo difennet d'ar re-mañ mont gant ur marc'h-houarn zoken.



Mont gant ar plankenn-ruilh avat n'eo ket difennet dezho ! Moarvat peogwir eo ur sport amerikan ha dianav neuze d'ar gouarnamant.

Ur gevredigezh anvet « Skateistan » a ro tro da vugale Bro-Afghanistan deskiñ penaos mont gant ur plankenn-ruilh a-benn lakad anezho d'en em santout kreñv ha youlek en o buhez daoust d'ar baourentez ha da lezennoù strizh ar vro. Gant ar gevredigezh e vez sikouret ar vugale-se da vezañ skoliataet ivez.



Merc'hedigoù e-kerzh u

Emgav gant  
**Hanifa**, 15 vloaz  
penngelenner  
war ar plankenn-ruilh  
gant « Skateistan »



« Pa ra ur bugel  
**KELENNEREZ**  
ouzhin en em santan  
**laouen-bras.** »

« Amañ em eus desket penaos mont gant  
ar plankenn-ruilh ha c'hoari mell-droad.  
Barrek on war an daou sport-se bre-  
mañ. **Bamet on bet pa oan**  
**deuet a-benn d'ober ur**  
**c'h-kick-flip** gant ma flankenn. »  
(pa tro ar plankenn dindan an  
treid e-pad ul lamm)

« **Gwechall e labouren er**  
**straedoù** hag e c'hoarveze kalz traoù fall  
din. Bremañ ma vezan kelenner  
em eus ar  
santimant da vezañ unan gouest da gas  
raktresoù da benn en he buhez. »

« **En amzer da zont**  
e ijnin darvoudoù brav e-leizh en  
ma buhez. Sur on e tevin da vezañ  
ur skatourez vrudet e Bro-  
Afghanistan un deiz bennak. »



prouad matematikou



Hanifa



C'hoant 'teus da c'houzout hiroc'h ?  
Kae war al lec'hienn [www.skateistan.org](http://www.skateistan.org)  
ha war [www.ya-ouank.com](http://www.ya-ouank.com) evit sellet ouzh videoioù  
Trugarez da Skateistan International

UN NIVER...

Gallout a ra ar merienn dougen

50

GWECH o fouezh !

KRAK HA BERR

Traouigoù pe titouroù fentus !

Dit da ginnig ivez !  
Kas ur postel da  
camille.kvb@orange.fr

UN DEIZ...


D'AN 29  
A VIZ GWENGOLO



e vez dalc'het devezh etrebroadel an dud vouzar.

HA GOÛT A REZ...

Kigenn KREÑVAÑ DA gorf eo DA DEOD !



GWIR EO !



Kontet en deus Evo Morales, prezidant Bro-vBolivia, en defe evet e didich pa oa yaouank a-benn parañ. Evit meur a boan e vez kinniget gant Medisined Indian ober gant an evaj prizius-se !

AR MOR MARV



Ha goût a rez n'ez eus PESK ebet er mor-se ?  
Abalamour eo kalz re SALL ! Ken sall hag e c'heller neuñviñ digudenn...

YEZH AR SINOÙ

Evit sinañ PAOTR

Gra van tresañ ul linenn eus an tu-kleiz d'an tu-dehou war da zal gant da viz-meud.




Marianne Larvol

EEEEEC'H !

Peseurt doare bramm eo an hini

RUKUNUS ?



Unan druz an hini eo !

DIVIN'TA

Ur verc'h o deus an Itron hag an Aotrou ABEPTRA.  
Peseurt anv he deus ?



Sara ! Sach a bep tra...